

Dizano : Chañson an dañsou

War eun ton nevez

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Eur bern geriou galleg brezonekaet a zo e-barz ar skrid orin. Faziou kemmaduriou a zo e-leiz. Bet savet e fin an XIX^{ved} kantved.

Tostait amañ, tud a skiant, me ho ped hag ho supli,
Manet ez eo amañ bouhet va oll filozofi,
Krignad a ran va bizied, ha frota a ran va zal,
Heb galloud birviken kompren, hen lared 'ran, heb farsal,
Ar charmantiz d'ar yaouankiz da lampad ha da zañsal.

An abitud-se a deu gante, me a gred, war an douar,
Peotramant hen kontraktont da dri bloaz pe da bevar,
'Vid, p'hello ar hrennarzedez treina o hotillonenn,
Hag ar grennarded o-unan boutoni o bragezenn :
Ne heller pelloh o delher, ar yaouankiz 'zo 'n o fenn.

Eun tamm oh diweznad, beleien, d'o gervel d'ar hatekiz,
Ha pa ve posubl eh hallfeh, da gas o horv d'an iliz,
O spered 'zo en dañsou, gand se ne raint netra.
Da galz euz ho kestonou o genaouiou a lavar A !
Pa houlit¹ hag int 'vo kristen, e respontint *tra la la*.

Neuze eh efet en koler, hag e zertot² a êzenn,
Ha koulskoude, m'en em zoñjfeh n'en-doh mann en o hichenn,
N'hoh ket kapabl, gand hoh oll studi, evelte d'en em beintañ :
Peleh 'oufeh-hu-c'hwi lakaad jour en eur hoof doublet a rann,
Nag ho mouchouer en kalkenn, peleh oh manet bremañ ?

N'ez eus liboudenn a bemp bloaz na zesko deoh ho kentel,
Beza o-deus eur meleznour ; pintet int en dimezell,
Deh e oa en he jakedou, na ouie ket he *fater*,
Dantelezet e' he hoofou, brodet e' he zavañjer,
Frizet e' he hotelienn³, rubanet he boutou-ler.

Me 'gred e klevan ar zoner savet war e varrikenn.
Tano e' diousskouarn ar merhed, sevel a reont o fenn ;
Dioustu 'komañsont da vreskenn a-dreuz an ed, ar hleuziou,
'Vel pa ve an diaoul war o lerh, peotramant an Ankou,
Ha pa ve an ivern da dreuzi, bepred ez aint d'an dañsou.

M'he gwelfeh e-barz an dañsou, hounnez a zo fleurenn !
Admira a ra 'r baotred he c'hoantiz hag he skiant ;
Eksellant e oa d'al labour, menajerez ar gaerra,
Beb noz diweza da gousked, sevel a ra da genta,
Prisiusa gwreg e vije ! Mez cheñchet ez eo brema'.

¹ houlit : houlenit.

² e zertot : ?

³ he hotelienn : ?

Mar 'boa koant, pa oa plah yaouank, bremañ e' vil da flêrial ;
He hotillon 'zo kramennet, he bleo tennet war he zal.
Dibrenn 'e ganti he dillad, kollet ganti he spillou,
Ar vihienn demeuz he fri a ziver en he genou,
Evid he zouch, heb en em vantañ, eo red kaoud piñsetezou.

Sañses⁴ ema o kluchenni e ti he homerezed,
Pried, bugale ha menaj, oll e vent abañdonet ;
Ne oar na kannna na gwalhi, na memez skubañ he zi ;
Ne vank na plouz na c'hwenn ennañ ; karget e' a loustoni,
Evid antren heb vomisa e' red stouva stard ar fri.

Pa'h a an itron war he zorchenn, azezet en he hoaze',
Ha pa ve an tan dindanni, ne zavfe ket ahane ;
Implijet e' toud ar moyennou, n'eus ken manet netra,
Red e' bremañ cheñch a vicher, red e' mond da glask bara,
An ozah, 'leh dond d'he honsoli, a deu prest d'he bazata.

Setu amañ eur zon nevez, setu amañ eun dañs all ;
*Chassez-huit*⁵ e' red da ober, pe beza skoet raktal ;
Ha pa vanko an dañserez, dioustu 'devo eur vazad,
Hag ouspenn, eun taol troad en he reor ma na ve buan a droad
An dañs kenta 've amiabl, mez houmañ nan e' ket mad.

Finisa a ran va chañson, ne bad pelloh ar sujed,
Ho pedi a ran d'am ekskuz, mar em-eus hoh ofañset,
Kement-mañ 'zo abuzou n'o gwelom nemed re bemde'
Hag a deu, siwaz, re aliez, d'ofañsi e Vajeste.
Beza int meltivou indesant euz re a liberte.

⁴ Sanses : galleg. Dibaouez.

⁵ *Chassez-huit* : eun dañs dez an amzer-ze.